


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

C'hwec'hvet bloavezh

Niv. 62 - C'hwevrer 1972

An niverenn : 3,00 F

Koumanant-bloaz : 30,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz genver

EMSAV

B.P. 125, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Emdroadur an armerzh hag ar gevredigezh e kêr Douarnenez
en 19t kantved 62/39-64

An Emsav hag ar Vro (46) [EMVR-301 - 307] 62/65-70
Lizheroù /65-69. Danevelloù obererezh : Emvod hollek
Skourr an Deskadurezh Vroadel e Roazon d'ar 6
c'hwevrer 1972 /69-70.

EMDROADUR AN ARMERZH HAG AR GEVREDIGEZH

E KER DOUARNENEZ EN 19t KANTVED

1. Seitekvet hag eitekvet kantved.

Er 17t-18t kantved ez eo obererezh pennañ porzh Douarnenez ar pesketa sardin. Ar pep brasañ eus ar pesketadennoù ne vezont ket gwerzhet fresk : e Douarnenez hag e Treboul e vez gwaskelllet (1) ar pesked. En-dro da ijinerezh ar waskell e vez kenwerzh dre vor gant ar porzhioù ma vez bigi o loc'hañ etrezek ar broioù pell : Naoned ha Bordeaux dreist-holl. Evit ar rog (2) e vez ivez kenwerzh gant Norge. Un nebeut tud (ugent e Douarnenez e 1767) zo perc'henned d'ar bigi.

Hervez ar mare eus ar bloaz e vez etre 1300 ha 2000 annezad e Douarnenez.

Ken abred hag an 18t kantved ez anad ur skoilh bras da ziorreadur ingal armerzh Douarnenez : emañ e dalc'h ar sardin ha direol eo ar pesketadennoù. N'eus bet krouet obererezh pouezus ebet er-maez eus kenderc'h ar sardin.

Adal an 18t kantved e verzer un diouer terkadurioù er porzhioù : n'eus netra en hini eus ar pevar forzh (Rozmeur, Porzh-Ruz, Pouldahud, Treboul); diskaret eo bet kal Pouldahud e 1200 ha ned eo ket bet ratreet abaoe.

An hevelep diouer zo e kêr Douarnenez, a zo savet fall-tre : a-hed al ledenez ez eus tevennoù ha n'eus bet kavet biskoazh un doare bastus da eren savenn uhelañ kêr ouzh porzh Rozmeur ma tegouezh ar sardin.

2. Hanterenn gentañ an 19t kantved.A. Pesketaerezh ar sardin

Eus 1800 da 1821 ez eo skoilhet ar pesketaerezh gant brezelioù Napoleon : an emgannoù war vor hag ar c'haeladur a vir ouzh ar besketaerion a vont er-maez.

Goude 1821 e vez pesketadennoù pullh evel ma c'hoarvez bepred goude bloavezhioù shan (el. Emeav 42/177 1970). Labour a vez evit an 2500 martolod eus karter Douarnenez, hag e-tro 500 chaloupenn a niverer. War bep bag e vez ur mestracuer, pevar martolod, un deskard hag ur mous.

Gwaskelllet e vez 90 % eus ar sardin pesketaet. Etre Douarnenez ha Treboul ez eus 150 labouradeg; e pep hini e vez un toneller ha peder flac'h o labourat. Ar gwaskellerion hag ar gwerzhourion a oa ivez paramantourion (3). War ar "bagoù borc'hizien" e veze perc'hennet et bag, ronedoù ha rog gant ar paramantour. Ar vag "greet" a veze fiziet er vartoloded. Ur gopr izek (hag isel-kenan) a roed dezho. Etre pemsek e veze rannet gwerzh ar besketadenn : pevartek lodenn a yae gant ar paramantour ha dasparzhet e veze ar pemsekvet etre ar vartoloded (4).

B. Ar boblañs

E derou ar c'hantved e kresk gorrek ar boblañs en arbenn eus ar brezelioù (un nebeut extiridiurioù ez eus zoken war-du al labour-douar). Herrekoc'h ez a ar c'hresk da c'houde hag e noter un nebeut entiridiurioù. Setu sifroù ar boblañs evit Douarnenez ha Floare e 1800 hag e 1851 :

	1800	1851	
Kumun Douarnenez	1700 ann.	4500 ann.	(x 2,5)
Douarnenez + Floare	3500 ann.	6600 ann.	(x 2,2).

Ur boblañs yaouank eo hini Douarnenez en hanterenn gentañ an 19th kantved. An hanter eus an annezidi zo dindan 22 vloaz. Uhel eo ar feur-genel : 42 %, uhel ivez ar feur-mervel : 32 %.

E-se ez eo disheñvel-kreñn luniad ar boblañs e Douarnenez diouzh hini Europa, ha Frañs pergen (5). Eno edo ar feurioù-genel ha -mervel o tigrekiñ endeo, ar boblañs o koshaat snta (6).

K. An terkadurioù

Disneus e chom kêr Douarnenez : da straedoù a'eus nemet riboulioù. Diyac'huz eo ivez hag an dour-evañ e ra diouer. Kilañ a ra ar c'muzul-kêr rak an diaesterioù hag an divisoù da gemer.

Dister e chom an terkadurioù nevez er porhioù : un nebeut kempennadurioù er Porzh-Ruz, ur c'hal bihan e porzh Rozneur (1826-1836).

3. Staliadur ar bouedvirerezh e Douarnenez (1851-1860).

A. Ar bouedvirerezh

Da heul dizoloadenn APPERT e 1809 e Naoned e voe savet eno ar vouedvirerezh kentañ e 1825. Gant Maonediz e voe astennet an ijinerezh nevez-se a-hed aodoù Breizh (7).

Ur c'henderc'had nevez eo ar boestoù-mir, o tegas un-nevid nevez (teir gwech keroc'h eo ar sardin e boestoù eget ar sardin gwaskellat; kalz pelloc'h e c'hellont bezañ dezouget ha gwell e c'houzañvont ar wrez). Brasoc'h eo ar greantioù boestoù-mir eget al labouradegoù gwaskell : teir gwech muoc'h a bostadurioù a c'houlenmont hag, euzhpenn se, ez a war gresk ar postadurioù keitat er bouedvirerezhioù. Kalz muoc'h a wezhourion a vez en ur vouedvirerezh : niver keitat ar vicherourion pe micherourezed dre c'hreantioù zo 60 an departamant 29 e 1860.

Lec'hiet mat eo Douarnenez evit degemer ar bouedvirerezh :

- ar porzh kentañ eo e 1850 e Breizh (hag e Frañs) evit tols ar sardin pesketaet;
- un hengoun ijinerezhel zo e Douarnenez ha dreist-holl ez eus eno tud boas da labourat el labouradegoù;
- da heul ar Reverzhi C'hounezel ez eus tud dilabour war ar maezioù er c'humunioù amezek da Zouarnenez : e korn-bro ar C'hab hag ivez e korn-bro Kemper.

Koulskoude e voe ret gortoa ugent vloaz evit ma amlede ijinerezh ar boued-mir eus Naoned da Zouarnenez. Anat eo amañ emalc'h mirelour gwaskellerion Douarnenez. Desho eo an esañ da niorren an ijinerezh nevez : war lec'h ar pesketa emaint, bigi so en o c'herr, pesketaerion a anavezont, micherourion ha micherourezed a labour endeo evito, kevala ha kellidoù o deus. Hogen kenderc'hel a reont da staliañ labouradegoù gwaskell. Gant Naonediz dreist-holl e voe diazeset ar bouedvirerezh e Douarnenez (8).

B. Ar bouedvirerezh hag ar waskell e Douarnenez etre 1851 ha 1880

Betek 1855 e talc'h ijinerezh ar waskell da greskiñ. Dister e chom c'hoazh ar bouedvirerezh. Adalek 1860 avat ne ra ar waskell nemet kilañ e gounid ijinerezh ar boestoù-mir.

Staliadur ar greantioù a glot gant ar bloavezhioù ma vez paot ar pesketadennoù (sl. krommenn IV en dibenn). E 1853 ez eo savet ar greanti kentañ e Douarnenez; e 1881 e sav an niver da 21.

E 1880 ez eo Douarnenez kentañ porzh Breizh (ha Frañs) evit er boued-mir (boestoù sardin a vez graet dreist-holl neuze, hag un nebeut boestoù legumaj ha toun). E-tro 600 den a vez o labourat e greantioù Douarnenez : 85 % anezho o vesañ micherouezed, 13 % souterion, 2 % darbarerion (9).

E 1863 e teu an hent-houarn betek Kemper hag un tammig lañs a zeu gant gwerzhañ ar sardin fresk. Dister e chom avat kenwerzh ar pesked fresk e-akoaz hini ar pesked boestoù.

Un endroadur zo e dezvad ar pesketaer etre 1850 ha 1880. A-rack 1850 e oa dibaot ar besketaerion perc'henned d'o bigi. Diwar neuze e stagont da berc'hennañ darn pe sarn eus o araezioù-pesketa : rouedoù ha rog pergen. Ar vestraouerion a grog da zibab o martoloded. Dre ar gounid a dennont eus pesketadurioù nevez, ar brishili (10) da skouer, e prenont bigi, gant skoazell ar besketaerion all. Arc'hant a lakaont a-gostez dre arboellañ ar rog ha dre lakaat ratreañ o rouedoù gant tud o ziegzh.

K. Ar poblañs

Etre 1850 ha 1881 e kresk poblañs Douarnenez eus 130 % (x 2,3) :

	1850	1881
Douarnenez	4200 ann.	9800 ann.
Douarnenez + Floare	6600 ann.	12700 ann.
Douarnenez + Floare + Treboul		15700 ann.

Kresket eo c'hoazh ar feur-genel e-keñver ar prantad kent : e-tro 46 % e Douarnenez. Krog eo ar feur-mervel da zigreskiñ : eus 33 % er prantad kent e tiskenn da 30 %. E Frañs e kaver sifroù kalz izeloc'h hag o tigrskiñ dizehan (e 1850 : feur-genel 25 %, feur-mervel 22,5 %), - sl. an Taclennoù II ha III en dibenn.

Entiriadurioù bras a vez eus maezioù ar c'hainvro : e 1856, un drederenn eus ar besketaerion n'int ket bet ganet e Douarnenez. Bez' ez eus estiriadurioù ivez, pesketaerion eus Douarnenez o vont da chom da borzhioù all. Gant hollad an treustiriadurioù e sav poblañs Douarnenez eus 2800 annezad etre 1851 ha 1881.

Dre ar c'hendreiñ remziel hag egorel e kresk enta poblañs Douarnenez. Heñveldra evit Treboul ha Floare.

D. An terkadurioù

Ranngêr porzh Rozmeur, re enk, a zeu da vesañ lec'h unner ar besketaerion pa's a ar vourc'hision da sevel ur ranngêr nevez ubeloc'h.

War greskiñ emañ Treboul, bennozh d'ar greantioù nevez, bennozh d'ar porzh-houarn savet eno e 1880.

Er porzh-kenwerzh (Porzh-Ruz) ez eus savet 360 metrad kae. Er porzh-pesketa (Rozmeur) ez eus atredet un darn eus ar porzh evit terkañ ul lec'h da werzh ar pesked fresk.

4. Eus 1880 da 1901. Enkadenn gentañ ar pesketaerezh (1880-1887)

A. Ar pesketaerezh hag ar greanterezh stag outañ

Etre 1880 ha 1887 e voe un enkadenn er pesketaerezh dre Vreizh a-bezh. E 1880 e kouezhas ar pesketadennoù d'ur bempedenn eus tizhoù 1879; sifroù etre e voe evit 1883 e Douarnenez, - tra ma choment izel er peb-all eus Breizh; e 1884 e kouezhont da vann. N'eo nemet e dibenn 1887 ez adkrogas ar c'henderc'h da vesañ reoliek er Finistère. Klasket e voe an arbennoù eus seurt steuziadur ar sardin er rannverioù boas, ha goulakadurioù diseurt a voe kinniget (11). An enkadenn a lakae war wel an ezhomm a oa da 'studiañ ar sardin'. An enklaskoù gouezoniel avat a c'houlenne amzer hag arc'hant hag ar c'hreantourion oa prederietoc'h gant ar c'hevseurezh etrese eget gant labourc'hioù oc'h amplegañ kenlabour (12). En o c'hera o deus miradoù ruzsel a ro dezho an tu da c'hortoz bloaz da nebeutañ hag alies pelloc'h. Gouzhpenn se e kavont doareoù da hepkorif an enkadenn e Breizh. Darn anezho a ya da sevel greantioù e lec'h all : n'eo ket tra nevez a-berzh greantourion Breizh, met gant an enkadenn int broudet d'ober annezad-

urioù nevez e Spagn ha dreist-holl e Portugal; en div vro-se e vez puih ha reoliek ar pesketa (argemñañ a ra er c'henderc'h eus 1 da 1,5 hervez ar mare bloaz, tra ma argemñ eus 1 da 16 e Breizh), ha ma pad koulzad ar sardin tost a-hed ar bloaz. O vont da ziorren ar boued-virezh da Spagn ha da Portugal avat e taol greantourion Breizh da zistrujañ an unwerzh a biaovent betek neuze (13). Un tun all arveret ganto da barraat ouzh an enkadenn e voe oberiañ boestoù-mir e Spagn pe e Portugal hag o gwerzhañ evel o tont eus Breizh (14).

Rouez eo ar pennoù-embregerezh o klask diorren kenderc'hioù-amsaviñ, - pezh a vez graet ned eo ket a-walc'h da gempouezañ diouer ar sardin.

Amjestroc'h ez a an nevid gall e-doug an enkadenn, pa vez devedet digreskiñ an taosoù war an enporzhiañ boestoù-mir goude 1881 (15); digemñ e chom ar prizioù e Frañs: finzo d'an unwerzh piaouet betek neuze gant greantourion Breizh.

Gant an enkadenn ivez en em gav pesketaerion 'zo broudet da wellaat o doareoù pesketa. Hogen ar warizi pe ar c'hevezerezh etre pesketaerion eus porzhioù disheñvel a vir ouzh ar c'halvezderioù nevez a emledañ. Ar Stad c'hall diouzh he zu a laka skoilhoù ouzhpenn dre zarbenn kement goulenñ graet outi da verzañ ar rouedoù nevez da skouer, gant ma ve graet taer a-walc'h ar goulenñ (16).

Koulskoude, an darn vrasañ eus ar besketaerion a zeu a-benn da dreuzvefañ bennozh d'ar pesketadurioù all hag ivez d'ar bloavezhiañ sardin 1883.

Gwashoc'h emañ an traoù gant ar vicherourion hag ar re baourañ anezho a rank divroañ.

E-doug an enkadenn e voe serret tri greanti diwar 21. Eus 1888 da 1901 avat, gant distro ar sardin, e vleunias ar bouedvirezh en-dro: e 1902 e oa 27 greanti e Douarnenez. Gant Naonediz ez eo perc'hennet ar stalc'hoù brasañ, gant CHANCERELLE ha BEZIERS pergen (17). Greantioù all o deus diazezet war an aod atlantel, met Douarnenez zo o tont da vezañ sez-kreiz o embregerezhioù.

A-hend-all e vez degaset gwellaennoù kalvezel en sozidigezh ar boestoù-mir: an erionñ a gemer lec'h ar soutañ evit klozañ ar boestoù; an arsakadenn bouezus-mañ ne voe ket dedalvezet kalz a-raok 1900 ha ne voe arveret en derou nemet gant ar boestoù kranennek (18).

E-tro 70 % eus ar c'henderc'h a vez exporzhet. Mui-ouzh-mui emañ kementad ha dasparzh an exporzhañ e dalc'h an anveziadoù armerzhel etrevroadel (19). E dibenn ar c'hantved ez a 40 % eus ar sardin exporzhet da Vreizh-Veur, 20 % d'ar Stadoù-Unanet, 10 % da Alamagn, 10 % da Rusia.

E-pad an enkadenn e oa bet aloubet marc'had Frañs gant sardin Spagn ha Portugal. E 1900 avat ez eo adpiaoet en e beder fempedenn gant greantourion Breizh, - skoazellet gant al lezenn valtouterezh eus 1892 a zaougemente an taosoù-enporzhiañ.

An hent-houarn a ereas Douarnenez e 1880 ouzh marc'hadou Frañs. Lakaomp ivez e voe aozet mui-ouzh-mui a voestoù-mir bihan evit ar bevezerezh tiegezhel. E Frañs etre 1880 ha 1902 e voe lieset dre 2,4 bevezadur ar boued-mir.

War un dro gant ar pesketaerezh e tiorre ar barasantouriezh. Etre 1895 ha 1900 e vez savet a-tro 150 chaloupenn bep bloaz.

E 1900 ez eus un oberiataerezh boestoù houarn e Douarnenez. Betek neuze e teus an houarn gwenn eus Breizh-Veur. Ken abred ha 1860 avat e krogas da zont eus gouezhioù an Henbont (20).

Elfenn bouezus all: etre 1888 ha 1901 e terasou an arc'hadurioù micherel e Douarnenez hag e 1895-1896 ez eus an ec'hvelioù kentañ gant ar souterion a c'houlenn ma ve kresket o goprou ha gwellaet azioù o labour. E 1896 eo savet ar c'hveluniad souterion kentañ. Rediañ a ra ar c'hreantourion d'ober smglev. Un nebeut pennoù-embregerezh evelkent a nac'h enfredañ souterion c'hveluniadet. E 1896-1897 ez eo ar besketaerion a ra ec'hwel da c'houlenn kreak war bris ar pesked. Diefed avat e chom o arc'hadur.

B. Ar boblañs

Krommenn an treustiriañ a heuilh hini ar pesketadennoù. Gant an enkadenn ez eus ur paouez e kreak ar boblañs diwar estiradurioù; etre 1891 ha 1901 e kreak adarre hag e noter entiradurioù.

	1881	1891	1901
Douarnenez	9800 ann.	10900 ann.	12800 ann.
Douarnenez + Floare + Treboul	15700 ann.	17000 ann.	20800 ann.

Digresket eo ar feur-genei, eus 47 % e 1881 da 34 % e 1901.

kalz ubeloc'h eo c'hoazh eget hini Frañs (22 %). Digresket eo ivez ar feur-mervel, eus 30 % e 1881 da 18 % e 1901 (e-tro 20 % emañ e Frañs, 16 % e Breizh-Veur). Dre goshaat eo enta he deus kresket ar boblañs etre 1881 ha 1901.

K. An terkadurioù hag an aveadurioù

An terkadurioù boulc'het e kêr (hentoù nevez, sevel tiez) etre 1870 ha 1880 zo harzet gant an enkadenn.

Evit ar porzhioù ne vez graet tost netra, daoust d'ar pesketaerien noù pact etre 1888 ha 1901. Ret eo d'ar besketaerion goulenñ ur porzh en dour don evit ma ve hiraet un tammig kae Roameur. E Treboul ez eo gwashoc'h c'hoazh, ken e kav gwell pesketaerion Treboul dont da Roameur. Ne zeuer ket a-benn da virout ouzh an traesh a stanksañ ar Porzh-Ruz. N'eo nemet goude ma veuzas micherourezed er Porzh-Ruz e tivizad sevel e 1883-1885 ur pont, re strizh, lesanvet "Pont Bras", oc'h eren Douarnenez ouzh Treboul (21).

5. Eus 1901 da 1913-1914 : eil enkadenn ar pesketaerezh.

A. Ar pesketaerezh hag an ijinerezhioù stag outañ

Etre 1894 ha 1901 ez eo 22 500 t tolz keitat ar sardin pesketaet gant Finistère; etre 1901 ha 1913 e kouezh ar c'heñvad-se da 6 400 t. Pesketaerien damvat zo e 1904 (15 000 t) hag e 1909 (14 000 t); e 1907, en eneb, Finistèriz ne dennont nemet 800 t sardin eus ar mor. E Douarnenez e koazh niver ar bouedvirerezhioù eus 26 e 1902 da 20 e 1913.

Evit ar c'hreantourion eo disheñvel an enkadenn-mañ diouzh an hini gentañ. Diaesoc'h eo he heporiñ evel m'o deus graet ar wech a-raok, ret eo dezho stourm outi ar wech-mañ.

Ne zigresket ket diouzhtu an ezporzhioù boued-mir o tont eus Breizh : miradoù a vez gant an embregerezhioù o talvezout dezho da gompesañ direollegezh ar pesketa; pesketaerien 1904-1905 ha 1909-1910 a ro tu dezho da amparañ miradoù nevez. War hiroc'h amzer koulekoude emañ an ezporzhioù eus Breizh war zigresket abaoe 1879 (ouzhpenn 15 000 t e 1879; dindan 10 000 t e 1901-1902; dindan 8 000 t e 1904;

dindan 4 000 t e 1912). Hag e-keit-se emañ ar bevezerezh o kreskiñ a pep lec'h, aloubet e vez ar marc'had etrevroadel gant kenderc'hadoù Spagn ha Portugal, hag ivez, dre gevezerezh displeal, gant kenderc'hadoù Norge hag ar Stadoù-Unanet (23).

E Frañs e taougement bevezerezh ar sardin-mir etre 1902 ha 1913. Aloubet eo ar marc'had hogos en e bezh gant enporzhioù o tont eus Spagn, Portugal hag Aljeria (a-getep 65 %, 20 % ha 12 % eus ar sardin enporzhiet e Frañs e 1913). Adalek 1906 ez enporzh Frañs muioc'h eget ma ezporzh a voestoù sardin mar seller ouzh an tolzoù. Mar seller ouzh ar gwerzhioù, es eo e 1912-1913 e sav evit ar wech kentañ gwerzh ar sardin enporzhiet dreist da werzh ar sardin ezporzhiet. A-benn parzhat ouzh seurt degouezh ez eus douget e 1912 ul lesenn e c'horren an taonoù war ar boestoù enporzhiet. Disfed e chom an deav avat an arbenn eus an disreolerezhioù asantet gant ar Gouarnamant (24).

Diwar 1903 en em stroll an hanter eus pennoù-embregerezh Breizh evit studiañ an enkadenn ha klask diskoulmoù denki. Hogen ne c'hellont ren enklask pleustrek ebet hep kenober ar besketaerion hag ar re-mañ a eneb outo. Er prantad a-raok (1888-1902) o deus ar c'hreantourion lezet ar prizioù da gouezhañ ken izel ma teue splitusoc'h d'ar besketaerion ar bloavezhioù a gendro'h-etre eget ar bloavezhioù ma veze puilh ar pesked. Mar e anat bremañ d'ar c'hreantourion o deus eshonn da skoulmañ darempredoù a genlabour gant ar besketaerion, n'eo ket chalet ar re-mañ da reiñ dezho o skouarnell.

An enkadenn a laka ivez war wel an eshonn da wellaat an arazhoù-pesketa, dreist-holl pa geñverier gant an hentennoù arveret e Spagn pe e Portugal (25). Hogen rak aon na ve pesketaerien reñverek e kav gwell ar besketaerion enebañ ouzh pep hentenn nevez, ouzh pep roud nevez pergen. Arguzennoù disurt a voe degaset, evel prii-koust ar roudoù nevez, - arguzenn doull pa ouzer edo ar C'hred-mor nevez krouet prest da bourchas prestoù; stourm e voe ivez a-berzh ar c'hvel-unidoù ha, gant ar politikerezh gall oc'h emellout, e teuas roud eeun an hendadoù da verañ republikan, tra ma lakaed da glistourmer ar roudoù nevez (26).

Dirak enebiezh ar besketaerion ez embreg stroll ar c'hreantourion pouzadurioù war ar Gouarnamant evit ma savfe ur bodad heñvel da studiañ an enkadenn. Dre an Enskrivezh-mor en deus ar Gouarnamant

beli war ar besketaerion. Met ne ra nemet termal, ne ziviz nemet pa vez rediet d'hann ober gant ur stroll pouezus pe taer a-walc'h. Ar pouezadurioù kroget e 1903 gant stroll ar pennoù-embregerezh a daol frouezh; ned eo avat nemet e 1904 e stag ar bodad kefridiel gant e labour (27); prest eo e zanevell e derou 1906, nemet e vo embannet ent kefridiel en eost 1907 hepken. E meurzh 1906 ned a ket Kambr ar Gannaded pelloc'h eget ober anv eus diorreadur ar c'henderc'hañ rog hag eus aoadur ar C'hred morel. An diskoumoù kinniget gant ar bodad kefridiel zo anezho dreist-holl arnodif rouedoù nevez (28). An arnodoù erbedet ne vint ket graet avat en abeg d'ar skoilherezh renet gant ar c'hweluniadoù a c'houlenn bep bloaz da geñver o c'hendalc'hioù ma ve berzet pep araez-pesketa nevez ha ma ve nac'het ober pep arnodadenn.

E 1908-1909 e vez gwell ar pesketadennoù; nemet e teraoz ur reuziad nevez a ziaesterioù. Un nebeut greantourion a glask arnevesaat oberiataerezh ar boestoù-mir, an doare da glozañ ar boestoù dreist-holl (29). Marc'hadmatoc'h eo an doareoù nevez, kalz buanoc'h ivez e vez kaset an oberiata (alese e vez gwell perzhed ar pesked, ha kresket eo barr-kenderc'hañ ar greantioù), nebutoc'h a vicherourion ez eus ezhomma, ha n'eus ket ezhomma ken a vicherourion arbennikaet. Gouz arver ar c'halvezder nevez e krog ar souterion da stourm. N'eo ket ar wech kentañ : e 1896 hag e 1902 o deus graet ec'hwel dre an hevelep abeg endeo (30). Ret eo kompren ez eo ar souterion ar vicherourion tizhetañ gant an enkadenn. Ne vevont nemet diwar ar bouedvirerezh ha n'eus labour all ebet evito war al lec'h. Taeroc'h ez ersavont eget ar vicherourion all : muloc'h a c'hweluniadourion zo en o zouez eget e-touez ar rumoù all; gwelloc'h gopret e vezont ivez eget ar re all. D'ar micherurezed e vez aesoc'h kavout labour e kêr pe war ar maez : o arc'hadurioù o devez ankaniou all (31). An darn vrasañ eus ar besketaerion a c'hell treuzvefañ gant korvoderioù treut, a-wechoù dereat, war ar pesketadurioù all. D'ar souterion ez unad an ardivinkoù nevez evel dibenn o labour hag ar ret divroañ evito.

Evit ar c'hannad republikan eus Douarnenez, G. LE BAIL, ez eo eun an traoù : "Mirelour rik ha diflach a-grenn e rank chom bouedvirerezh gall ar sardin" (32). Kendrec'het eo un nebeut souterion e vo ret dezhañ pe seiz degemerout an ardivinkoù nevez hag en en glevout

gant renerion ar greantioù. Patromed, en un nebeut embregerezhioù, a eas asant gwarantif an hevslep labour ha kent d'ar souterion, o ouestlañ arverañ an ardivinkoù nevez evit kreskiñ o barr-kenderc'hañ hepken. An darn vrasañ eus ar c'hreantourion n'emaint e soñj ober gant an ardivinkoù nevez diouzhtu, padal ez int mennet d'hann ober pa blijjo gantoù. Daonet ma c'houlennont, ne fell ket d'ar Stad emellout en afer. Diwar se ez englev un niver greantourion, o c'hourdrouzañ paouez a breñañ pesked ha seizañ ar bouedvirerezh war bez miret outo a staliañ ijinennoc'h arnevez en o greantioù. E Konk-Kernev e 1909 ez eus enberegerezh digor etre renerion greantioù 'no hag ar vicherourion. Lec'hel e chom avat an arc'hadurioù ha rankout a ra souterion Konk-Kernev plegañ da zivizoù o fatromed (33).

Goude 1909, gant an enkadenn o padout, e rank un darn vat eus ar vicherourion klask ul labour all. Gant distro ar pesketadennoù treut e teu ivez war-c'horre kudenn an arnezioù-pesketa. E 1910 e c'houlenn c'hweluniadoù pesketaerion Finistère ma ve berzet ar euzienn arveret e Pennarc'h da bakañ brizhili. Harpañ e ra da gentañ ar Gouarnamant ha neuze plegañ e 1912 da heul "bruderezh ar c'helaouennoù er c'hevredig" (34). Er bloavezh-se end-eeun e kouezh kenderc'hadou Pennarc'hiz.

Da heul e tiviz stroll ar pennoù-embregerezh sarrif o greantioù betek ma vint e tro da arc'hvelañ recliak. Adal neuze ez emell ar Gouarnamant. Ar c'hreantourion a asant d'ar lec'h ur priz izek ha dilezel ar c'houlenn; ar besketaerion avat a nac'h arnodif rouedoù efedusoc'h, ha ne vez kennet netra. Maodiernezh ar Verdeadurezh a glask staliañ kengorioù e pep porzh, met ne vezont ket anvet.

Gant ar bresel hag an ezhomma bras a voued-mir a zeuz d'e heul ez eas da sillrenk kudenn ar rouedoù hag an arnezioù-pesketa.

E-ser an enkadenn e voe diorreet pesketadurioù all e Douarnenez : ar brizhili en nevez-amzer hag ar sprat e kerc'h ha genver. E Leizre-Inférieure (dep. 44) hag er Morbihan da geñver an enkadenn gentañ, e Konk-Kernev da geñver an eil enkadenn, goude 1907, en en antennas an tounetaerezh; e Douarnenez ned eo nemet e 1905 e kroger da barasañ dundioù bras evit an toun (35).

Pesketaerion all nevez a vez gwarantet frank ar grillod-mor pegen. Anavezet eo endeo ar grillod-mor ruz war ar c'hall. Da heul

pesketaerion Kameled ez ay Douarneneziz da besketa grilhed-mor glaz. Goude 1909 ez eont betek aodoù Rio de Oro ha Maouritania, e-lec'h ma teumont a-benn, e disoc'h lies taol-arnod, da ren ur pesketa askorus. Evit ar grilheta e reer ivez gant dundioù. E-pad enkadenn ar sardina e tacouement kenderc'h ar grilhed-mor (36). N'eus aze avat diskoulm nemet evit un dornadig pesketaerion : diester e chom ar pesketadennoù grilhed e-skoaz ar c'hementadoù sardin a ra diouer.

B. Ar boblañs

Ar boblañs a gendalc'h da greskiñ, n'eo ket ken buan koulskoude, evel ma tiskouez ar sifroù-mañ :

	1901	1906	1911
Douarnenez	12 900	13 600	13 800
Treboul	4 800	5 100	5 300
Floare	3 000	3 400	3 300
Douarnenez + Treboul + Floare	20 700	22 100	22 400

A-dizh e tigresk ar feurioù-geneel ha -mervel; buanoc'h avat e tigresk ar feur-geneel.

	1902	1906	1911	1912
Feur-geneel e Douarnenez	35 %.	28	21,3	18
Feur-mervel e Douarnenez	18 %.	19	14	14

E dibenn ar prantad-mañ n'eus ket ken nemeur a ziforc'h etre ar feurioù-geneel ha -mervel e Douarnenez ha re Europa.

An eztrifañ ned eo ket ken stank ha da geñver an enkadenn gentañ (560 etre 1901 ha 1911). Daou arbenn a c'haller merkañ da se : da gentañ ez eo aet kuit ar vicherourion bacurañ e grez an enkadenn gentañ; d'an eil ned eo ket an tiegezhioù ken niverek ken. Ar vicherourion divroer a ya da Paris, ar besketaerion da borzhioù all eus an aod atlantel.

Notenn-glozañ.

En hanterenn gentañ an 19^t kantved ez eus amparet e Douarnenez amveziadoù lañsus d'ar greanteladur : ur boblañs gant ur feur-geneel uhel, o kreskiñ enta, gwezhourion boas da labourat a-stroll er stalioù

gwaskell, ar pesketaerezh o pourchas un danvez kral evit ar bouedvirerezh, kevalaoh daspugnet gant ar waskellerion, ur c'henverzh dre vor diazezet mat. N'eo ket avat ar re a rene war an armerzh en amzer-se (ar waskellerion, a oa ivez kenverzhourion ha paramantourion) a roas lusk d'ar greanteladur. Eus Naoned e teuas ar re, bourc'hizion grenn anezho, a niorreas ijinerezh ar boued-mir e Douarnenez. Dre berzh o mirelouriezh e voe ar pennoù-embregerezh lec'hel divarrek da luskañ an arneveserezh er mare mat : kenderc'hel a rejont gant ar c'halvezderioù kozh e-lec'h degemerout ar re nevez.

An enkadenn gentañ (1880-1887) a ziskouezas ne oa ket pal ar c'hreantourion diorren ur greizenn a armerzh greantel e Douarnenez : da Spagn ha da Portugal ez eont, o heuliañ hepken pennaenn an helvoù uc'hek, - an unwerzh a blaomont o reiñ dezho an tu d'henn ober, - pe e chomont gant o miradoù da c'hortoz devezhioù gwelloc'h; nac'h a reont kenlabourat evit ma ve studiet peragoù an enkadenn; ne glaskont ket nemeur krouiñ kenderc'hadurioù nevez war al lec'h. E berr, greantourion Douarnenez ne amparont ket ur renkad o vleniañ an armerzh er gevredigezh ma emaint, met hepken ur stroll kevalacourion prederiet gant gounit helvoù uc'hek.

Diouzh o zu, ned eo ket ar besketaerion evit stourm ouzh an enkadenn. Un nebeud a grog d'ober gant roudoù nevez; ar brasniver avat a vir outo a genderc'hel. Daoust ma'z eus un ijinerezh greantel enezet en o c'horn-bro o pleuskañ frouezh o labour, e chom bev-mat en o zouez emframmoù ha studioù ar gevredigezh henvoazel : digenn e rank chom an doareoù pesketa, kevezerezh a vez bepred etre ar parrezioù pe ar c'hornioù-bro (e derou ar c'hantved ez eus komant a c'hweluniadoù pesketaerion ha ma'z eus a borzhioù e Finistère, - an em vodañ a recut noll koulskoude ur wech ar bloaz en ur c'hendalc'h).

An eil enkadenn a redi ar c'hreantourion da stourm war al lec'h. Pouezus eo er radi-se roll ar c'hevezerezh etrevroadel : ne c'hellont ket mont da lec'h all ma rankjent kevesiñ ouzh bouedvirerezhioù ar broioù all; d'ar pellañ en em stalont e Frañs e-lec'hioù ma n'eo ket bet diorret ar bouedvirerezh c'hoas. Pouezus eo ivez roll ar c'hevezerezh etrevroadel er radi da gorvoiñ an arackadennoù kalvezel ha da arnevesat an avedurioù. Strivoù ar pennoù-embregerezh douarn-

enezat etre 1900 ha 1914, pa glaskont diskoulmañ enkadenn ar pesket-
eerezh, a denn, muioc'h eget er prantad kent, da strivoù ur vourc'h-
izelezh vroadel. Kounamp avat n'emañ ket an holl c'hreantourion
a-unan evit lakaat arnevesaat kalvezerezh ar pesketa hag an oberiañ
boestoù-mir, - 40 % anezho nemetken zo er stroll; e Konk-Kernev e
1909 ez eus greantioù o labourat pa'z eus eo'hwelioù e reoù all.
Merkomp ivez e chom start al liammoù tiegezhel etre ar renerion gre-
antioù. Koulskoude gant ensezadur ijinerezh ar boued-mir e Douarnenez
uiwar 1890, gant derou ar greanteladur enta, e vez disteraet tamm-ha-
tamm pouez ar framm parrezel e kendera ar c'hreantourion ha dilezet
gant o stusioù sonnet an armerzh henvoazel. N'eur ket evit komz kouls-
koude a renkad vourc'hiz unvan a-raok 1914.

En sneb, e-touez ar besketarion hag ar vicherourion ned eo ket
distrujet ar framm parrezel : e-pad an eil enkadenn es anad splannc',
ha krisoc'h ar c'hevezerezh etre ar besketarion e borzhioù disheñvel
(dienez e Bro Vigoudenn); eo'hwelioù Konk-Kernev e 1909 a laka a-wel
an diouer a gengrediezh etre ar vicherourion eus porzhioù disheñvel.

N'eus ket ur renkad vourc'hiz o terc'hel darempredoù daelererzhel
gant ur renkad labourerion unvan eus an hevelap kevredigezh. N'eus
nemet ur c'hendere a vourc'hizion war unvaniñ ha strolloù pesketaerion,
strolloù vicherourion strewet dre ar porzhioù, dizunvan ha dic'houest
da ober penn d'o enkadenn.

Ha n'eo ket gant ar bolitikerion o deus dilennet e vezont skoaz-
ellet da velout sklaer en o diaesterioù. Ar c'hannad LE BAIL da skouer,
degemeret gant ar vicherourion hag ar besketarion evel o saveteer,
ne car nemet o enkañ muioc'h : gant berrweled e stourm ouzh an arnev-
esaat er bouedvirerezh, o lakaat al labourerion da grediñ e rank an
ijinerezh-se chom "mirelour rik ha diflach a-grenn" (32), o tifenn ar
roued eeun hep merzout e vez kalvezerezh ar pesketa oc'h endreiñ war
un dro gant kalvezerezh an oberiañ boued-mir (e Spagn hag e Portugal,
e tragont bloavezh greanteladur hepken (1880-1910) ez eo bet arneves-
aat ar pesketaerzh a-gevret gant ar bouedvirerezh : dilezet eo bet
ar bigi dre lien hag arveret e vez listri dre geflusker a ro tu da
embreger rouedek-tro ransel). LE BAIL a gav gwell tusañ gant arc'had-
urioù e dilennerezh fealañ eget kas an arc'hadurioù-se war-ôu un

diskoulm hirdermen.

Ar Stad c'hall kennebeut ne ra netra. Divarrek eo da genurshiañ
ar stourm ouzh an enkadennoù. Ne gemer un divis nemet pa vez rediet.
Ampellañ a ra bepred ar muiañ ma c'hell an divizioù da gemer - gant
ar spi moarvat ez adkroge ar pesketadennoù da wellaat, pe e sioulafe
ar vicherourion diouto o-unan : daleañ a ra da envel ur bodad kefrid-
iel da studiañ arbennoù an enkadenn, oc'h embann an disoc'hoù (e-pad
bloaz hanter), nac'h a ra mont da dredeog etre ar vicherourion hag ar
c'hreantourion e 1909; divizout a ra armodiñ rouedoù nevez ha dilezel
e ziviz hep ma ve graet netra, h.a.. A-du-rall e tegas al lu er gre-
antioù met ne ginnig netra evit reiñ gourc'hwel d'ar souterion. Berrañ
a ra rouedoù met ne ra tra evit kreskiñ ar pesketadennoù. Merkomp
diouzhtu ne oa ket boaz ar Stadoù frankisour e derou ar c'hantved
emellout en armerzh kement ha ma reont bremañ. Ales ivez an diefed
ma chome erbedadennoù ar Gouarnamant diwar ma ne asante ket dezho ar
brasniver, - evel m'hon eus gwelet en afer ar rouedoù nevez. Pensaos
ouzhpenn se lakaat strollioù parrezel da emglavout pa vez ar c'hudenoù
stignet uheloc'h eget ar barrez, - e par ar pesketaerzh e Breizh pe
ar bouedvirerezh er bed, - e berr, pensaos leviañ strollioù parrezel en
ur bed greantel ?

An diouer a leviadurezh armerzhel urshiet a-berzh ar Stad c'hall
a glot gant an diouer a lusk hag a youl diorren unvan a-berzh ar
boblans. Seurt diemell eus ar Gouarnamant en armerzh ne vir ket outañ
koulskoude a gemer disentezioù arvarus evit ar genderc'herion. Pouez-
usoc'h eo deshañ bastañ da vezezezh ar sardin e Frañs eget skoaz-
elliañ ar bouedvirerezh. Da geñver an enkadenn gentañ e kav gwell
herzel ouzh kresk ar prizioù e Frañs (ouzh digoll ar bouedvirerezh
enta) ha digreskiñ an taosoù-enporzhiañ (dre se diasaat d'ar voued-
virerion chomet e Breizh stourm ouzh an enkadenn, hag o broudañ da
amstaliañ e Spagn pe e Portugal). Da geñver an eil enkadenn, e chom
diwered a-grenn al lezenn o tiferañ kresk an taosoù-enporzhiañ (24),
talvezout a ra hepken da siulaat ar speredoù. N'eus ket muioc'h
gwered da gleannoù ar Gouarnamant gall ouzh-kevezezh dilezel ar
riesoù all.

An divizioù, pe an diouer a zivizh, a-berzh ar Gouarnamant gall
zo enta evit un darn e dalc'h ehaonoù armerzh Frañs; met klotañ a

reont ivez gant stad ar boblañs e Breizh.

Istor ar bouedvirerezh e Douarnenez zo ur skouer a c'hreanteladur darnel ha sac'het na gavas nepred an ode war-du un diorreadur armerzhel ha kevredigezhel gwirion. E-touez ar skoilhioù niverus a viras ouzh an diorreadur-se e Douarnenez hag e Breizh e c'haller dezrevellañ ar re-mañ :

1) Ar reizhiad c'hall ma'z eo ar bouedvirerezh un elfenn dibouez, n'he deus diegi ebet oc'h enkañ muic'h c'hoazh bouedvirerezhioù Breizh en o mareoù diaesañ. Nepred ne vez anv gant ar Gouarnamant gall da bledañ a-zevri gant kudennoù an ijinerezh-se.

2) Emframmoù kevredadel ha stuzioù ar gevredigezh henvoazel a ra d'al labourerion enebañ kenetrezo (eus ur porzh d'egile) ha herzel ouzh an nevezadennoù.

3) Ar reizhiad frankizour (pennaenn uc'hekadur an helvoù) oc'h aotren d'ar c'hreantourion postañ er-maez eus ar vro an arc'hant o deus tennet diouti.

4) An diouer e Breizh eus un unded politikel hag armerzhel barrek da drec'hif war al lazioù lec'hel, da sellout ouzh ar bouedvirerezh evel un elfenn a bouez, da sammañ al leviadurezh a oa dic'hallus d'ar Stad c'hall sammañ (an diouer a aveadurioù er porzhioù zo unan eus heuliadoù an diouer a leviadurezh armerzhel).

5) Furm nec'h-unan an ijinerezh diazezet : emañ ar bouedvirerezh e dalc'h amveziadoù diavaez d'ar vro (nevid etrevroadel, politikerezh ar Stad c'hall) n'o deus Breizhiz galloud ebet warno. Ouzhpenn se, e chom ar bouedvirerezh un ijinerezh digenvez : n'eus netra all a-fet greanterezh e Douarnenez nag en darn vrasañ eus porzhioù all ar Su (lakaet er-maez An Oriant, Sant Nazer ha Naoned). Pell emañ enta an tachadig greantel enezet e Douarnenez a c'hoari roll ur blein-diorren deshañ ur gwered-deluskañ war ar vro.

(1) Tri doare pennañ oa neuze da virout ar sardin : o "glizigañ" (doare arveret bremañ c'hoazh e Su Frañs evit ar glizig), o "sallañ", o "gwaskellañ". N'eus nemet evit ar waskell e c'haller er koez a ijinerezh.

Gwalc'het e veze ar sardin, sallet e paneroù ha lakaet etre gwiskadoù helen e-barzh barrikennoù anvet 'malestranoù'. E-pad pemzek devezh e chome ar pesked er malestranoù. Neuze e vezent gwalc'het en un dour sall nevez ha renket e kalc'h e-barzh toneilloù koad faou. Lakaet e veze tal an donell war-c'horre ha pouezet warnañ. Diwar-bouez ar gwaskellañ e save war ar sardin ul lifvenn graet gant dour sall hag un eoul anvet 'koilhan' e Douarnenez (si. Al Liamm 31/59 1952). Un iskenderc'h pouezus eus ar gwaskellañ oa ar c'hoilhan-se.

Ar sardin gwaskelllet a veze miret meur a viz. Bevezet e vezent war ar maez e Breizh dreist-holl hag e Frañs, hag ivez war al listri-kenwerzh.

(2) Stronk da sachañ ar sardin, graet gant vior moru. Eus Norge e teu ar rog; pouezus a-walc'h oa kenwerzh ar rog gant Norge evit ma ve ur c'honsuldi norgeat e Douarnenez.

(3) Brudet eo LE GUILLOU DE PENANROS, a oa kenwerzhour, perc'henn war lies labouradeg gwaskell ha war meur a vag-pesketa, a baramante ivez listri-trabotellañ evit kas ar sardin gwaskelllet da Naoned, La Rochelle ha Bordeaux, - distreiñ ar rent gant gwin, alkool pe helen eus Gwenrann.

(4) "Penaos e veze rannet gwerzh ar besketadenn e bourzh ar 'bagoù borc'hizien' ? Ar besketadenn a segemere ur miliard sardin diwar bemzek, da lavarout eo e veze rannet ar pesked etre pemzek lodenn. Pevarzek anezho a yae gant ar bourc'hiz, dasparzhet e veze ar pemzekvet etre ar besketadenn. Ul lod ha kard a zegouezhe d'ar mestrour hag ul lod da bep martolod. Kard lod ar mestrour e veze kemeret diwar hini an deskard pe ar mous, hervez nerzh, barregzh, labour pep hini war ar vag. Pa veze ul lod klok gant an deskard, 'paotr ar skoutilh', e veze ur c'hard lod gant ar mous; met mar degemere ar mous un hanter lod ne veze roet nemet tri c'hard d'an deskard". Th. LE GALL, L'industrie de la pêche dans les ports sardiniens bretons. Roazhon 1904, p.97.

(5) E hanterenn gentañ an 19t kantved emañ ar feurioù-geneel e-tro 30 % e Frañs, 33 % e Breizh-Veur, 40 % en Alamagn; hag ar feurioù-mervel e-tro 26 % e Frañs, 23 % e Breizh-Veur, 27 % en Alamagn (si. an Taolennoù II & III en dibenn).

(6) Etre 1800 ha 1850 e tigresek ar feur-geneel e Frañs eus 32 % da 27 % hag ar feur-mervel eus 26 % da 23 %. E Breizh-Veur e vez ivez an dacu feur o tigresekil.

(7) Tri frantad zo e diorreadur ar bouedvirerezh e Breizh etre 1825 ha 1880.

Er frantad gentañ (1825-1850) e weler ar greantioù gentañ stallet er c'hêrioù bras (Naoned hag an Oriant) o tleco'hiañ war-du al lec'hioù-pesketa hag ivez al lec'hioù na vez sioul-oc'h al labourerion (arc'hadurioù zo andeo gant micherurion Naoned). Marc'hadoc'h a vez kavet d'ar c'henderc'had nevez :

India, Breizh-Veur, Mec'hiko hag ar Stadoù-Unanet.

En eil prantad (1850-1860) e vez kresket c'hoazh an ezporzh-
iadurioù dre vor da heul dizoloadur an aour e Kalifornia (1848)
hag en Aostralia (1851). En diskouezadegoù etrevroadel (London
1851, Paris 1855) o deus ar c'hreantourion tro da vrudañ o
c'henderc'hadoù. Diorreet e vez marc'hadoù nevez en Europa, e
Frañs pergen, bennozh d'an hent-nouarn (e Naoned e 1851).

E Su Breizh emañ c'hoazh ar pep muiañ eus ar greantioù. E
Konk-Kernev hag e Douarnenez e chom paot labouradegoù ar waak-
ell. E par Breizh a-bezh e vez kenderc'h ket kement a sardin
gwaskelllet hag a sardin-boestoù : e-tro 5 000 t a bep seurt e
1853.

En trede prantad e taougement niver ar greantioù (e-tro 100
ez eus e Breizh) hag ez emled ar bouedvirerezh e Finistère
(pevarc'hementet eo niver ar greantioù en departamant-se). E
1880 ez eus 60 greanti e Finistère, 60 e Morbihan, 15 e Loire-
Inférieure (dep. 44).

E pep lec'h e kresk bevezerezh ar sardin-mir : e Frañs e rank-
er o enporzhiañ eus Italia. An ezporzhiaerion a vez diouzh an
amveziadoù etrevroadel : e 1864 e tigrekont eus 12 % pa baouez
Europa a brenañ kotoñs digant ar Stadoù-Unanet; e 1865 e kresk-
ont en-dro da geñver Brezel an Digevredañ er Stadoù-Unanet.
Un tammig gorrekoc'h e kresk an ezporzhiaerion e dibenn ar
prantad 1860-1870 : er riezou all, en Italia, met ivez e Breizh-
Veur hag er Stadoù-Unanet, emañ ivez ar bouedvirerezh o tiorren.
E 1874 e vez exporzhiet 85 % eus kenderc'h had Breizh : an hanter
da Vreizh-Veur, ar c'hard d'ar Stadoù-Unanet hag ar c'hard all
da riezou all Europa (ne voe ket tizhet ken da c'houde sifrou
ezporzhiaerion ar bloaz-se). War ar marc'h had gall e kresk an
enporzhiaerion (eus Aljeria e teont evit 99 %), anezho an
hanter eus bevezadur boestoù-mir Frañs.

E dibenn ar prantad-mañ e kresk ivez oberierezh ar boestoù-mir
toun, nemet e chom a eil renk e-skoaz oberierezh ar sardin-mir.

- (8) Gant an Naonedad CLERIAN e voe diazezet ar vouedvirerezh kent-
añ e Douarnenez etre 1851 ha 1853; prenet e voe stal CLERIAN e
1855 gant P. CHANCERELLE, un Naonedad all (ar vreurdeur CHANCER-
ELLE a oa endeo perc'hennet da lies labouradeg gwaskell etre
Sant-Nazer ha Douarnenez). Ur greanti all a voe savet e 1853
gant LEMARCHAND, Naonedad moarvat ivez, perc'henn douar e Treb-
oul. E 1880 o deus CHANCERELLE ha BEZIER, Naonedad ivez, pep
hini div vouedvirerezh e Douarnenez.
- (9) E 1880, war ar 59 greanti eus Finistère ez eus 21 e Douarnen-
ez; 1700 den zo o labourat enno : 85 % zo micherourezed, 13 %
souterion, 2 % darbarerion.
- (10) E 1859 e voe dizoloet brizhili dirak porzh ar Gelveneg gant
ur pesketaer eus Douarnenez. Gant se e voe krouvaet al luskad
"ar vag d'ar pesketaer" (Th. LE GALL). Gant se ivez e voe roet
lañs da borzh ar Gelveneg, e-lec'h ma tizhasas Douarneneziz.
- (11) Setu un nebeut displegadurioù kinniget : tremen a rafe ar
sardin dirak sadoù Spagn ha Portugal e dibenn ar goañv, hag

er broioù-se end-eeun emañ ar pesketaerezh war e lañs; ar roued-
où-stlej a reer ganto evit ar pesked all a zistrujfe boued ar
sardin; diouannet e ve an taoladoù sardin gant pesked marlonk,
h.a..

- (12) Boule'het e voe un enklask gant POUCHET eus imbours'hva Konk-
Kernev. En e glozadur kentañ e 1887 e lakas POUCHET e kont
arbennoù o tennañ d'ar vrez (hiziv bepred e lakae an daske-
mouñ gwrezverk e kaoz pa steuz ar pesked). War-benn kenderc'hel gant
e imbours'hioù e c'houlennas POUCHET skoazell ha kenlabour
digant ar c'hreantourion; en aner e voe goude 1887 : echu oa
an enkadenn.
- (13) "Spagn, ha dreist-holl Portugal, a denn korvo kalvezel eus ar
skiant-prenet gall, korvo kellidel eus ar postadurioù gall evit
ar pep brasañ, ha korvo kenwerzhel eus ar marc'hadoù gall kent".
André-M. D'AVIGNEAU, *L'industrie des conserves de poissons en
France métropolitaine*, Roazhon 1958, p.145. A.M.D'AVIGNEAU a
gomz eus Frañs, met 90 % eus ar c'henderc'h gall a zeu eus
Breizh. Ezporzhioù Frañs e 1887 a zeu evit an hanter eus
Portugal, evit ur c'hard eus Spagn hag evit ur c'hard eus Alj-
eria.
- (14) Tri doare zo da werzhañ "sardin Breizh" o tont eus Spagn pe
Portugal : ar 'boestoù gwenn' oberiet er broioù-se a vez tiked-
ennet e Breizh; pe azoet e vez boestadoù sardin e Breizh diwar
boestadoù bras degaset eus Spagn pe Portugal; pe c'hoazh, evit
digreskiñ ar mizou-dezougen, e vez kaset eus Breizh boestoù
goull da vezañ leuniet du-hont.
Notomp e vez ar c'hreantourion spagnat, portugalat hag ameri-
kan o pleustriñ ivez doareoù heñvel : ne vezont ket chalet o
skrivañ "Douarnenez" pe "Konk-Kernev" war o c'henderc'hadoù.
An Amerikaned a werzh glizig pe harinked evit sardin. E Frañs
n'eo nemet goude 1880 e vez reolerezh-lezenn war an anvad ken-
werzhel "sardin". Ar riezou all n'o deus ket mall da zilañsañ
kevezerezh o fesked-mir ouz re Vreizh. Kendivizad etrevroadel
1891, eo'h enderc'hel ar genderc'herion da verkañ war o boestoù
al lec'h-pesketa hag al lec'h-danzen, n'eo ket bet sinet gant
ar Stadoù-Unanet ha ne vez ket dedalvezet bapred e lec'h all.
- (15) E 1881 ez eo digresket eus an div drederenn an taosoù-enporzh-
iañ gall war ar pesked-mir, pezh o laka 7,5 gwech bihanoc'h
 eget an taosoù-enporzhiañ breizhveurat, amerikan pe rusian.
- (16) Abaoe 1862 e oa frank ar pesketa, doare hag araerion. Ijinet
e voe ar seulenn e 1872 e Douarnenez gant BELOT. Erbedet e voe
ent kefridiel "seulenn vras Belot" e 1864. E 1878, e-rack an
enkadenn, ez eo berzet ar seulenn e pleg-mor Douarnenez, ma
n'eo ket don ar mor. E 1881 e vez ijinet ar roued-tro gant
pesketaerion Penmarc'h. Diouzhtu e c'houlenn pesketaerion Gwaien
ma ve berzet ar roued-tro en o fleg-mor, lec'h-pesketa Pen-
marc'hiz, evel ma's eo berzet ar seulenn e pleg-mor Douarnenez.
Disheñvel e-grenn eo atuma ar strad en daou pleg-mor, met darb-
ennet eo goulenn Gwaieniz e 1882.

Koulakoude e oar an darn vrasañ eus ar besketaerion e vez muic'h a zistruj er mor gant ar rouedoù-stlej (arveret evit ar pesked-sol) eget gant forzh pe roued-sardin. Ali POUCHET eo ivez, an hini nemetañ en deus pleustret war ar gudenn en un doare skiantel.

Douost da se e vez devedet e 1888 berzañ an holl rouedoù-sardin estreget ar roued seun.

- (17) Emastenn embregerezh BEZIERS zo ur skouer eus gounidusted ar bouedvirerezh pesked. Dre emgellidañ, hep arverañ kred ar bankoù, e sav greanti goude greanti : e 1870 e tiazaz René BEZIERS e voadvirerezh kentañ e Douarnenez. Tregont vloaz goude en deus savet un eil greanti e Gwaien (1878), un trede e Kameled (1888), ur pevare e Sant Gwenole (1892) ur pempet e Douelan (1893), ur c'hwec'hvet en Enez Tudi (1894). Goude 1900 e stailh ivez greantioù evit al legumaj : en Oriant (1900) hag e Pont-'n-Abad (1905).
- (18) Gwellaennoù all a voe degaset e-keñver poazhañ ha sec'hañ ar sardin, dishadennañ ar boestoù gant ar gaster-gloz (pa vez dour er boestoù ne c'haller tizhout ar gwrezverk-dishadennañ nemet dindan wask).
- (19) Da skouer e 1888-1889 e kresk an eporzhadurioù war-du Breizh-Veur hag Argantina pa vez ar Saozon o postañ kevalaoù en Amerika ar Su. E 1890 e tigreskont a-dizh da heul an enkadenn o reuziañ Breizh-Veur ha dreist-holl Suamerika.
- (20) "Adalek 1892 e kresk buan ar C'hoverezh (en Henbont); berzh ar greanti-se zo disoc'h ar pouez kemeret e Breizh gant ar bouedvirerezh". A.M.D'AVIGNEAU, o.m., p.195.
- (21) E 1811 endeo e c'houlennas Kuzul-kêr Douarnenez digant gouarnamant an Impalaer Napoleon ma ve savet ur pont war stêr Porzh-Ruz evit an dreizhidell etre Douarnenez ha Treboul, etre ar C'hab ha foarioù Douarnenez, etre ar Porze, Kraozon, Douarnenez ha foarioù Komfort hag ar C'hab.
- E 1824 e voe divizet sav an dell-dreizh war ar pont ha padel-ehz an telladur. Hogen an Abad Antoine Adrien de MAUDUIT, perc'henn da zouaroù a-us d'an treizh, ne oa ket a-du; e 1825 e skrivas d'ar C'hont de CORBIERE, Maodiern an Diabarzh. Da arguzennoù e teganas ar bageerezh er Porzh-Ruz (aloubet gant an traezh endeo), ar c'hevezerezh etre Treboul ha Douarnenez, heumañ war he c'hresk, diouz un tu, ha diouz an tu all etre Pouldregad (ma emañ Pouldannd) war he diskar ha Floare o kreskiñ gorrekoc'h eget Douarnenez. Asant ar Gouarnamant oa bet roet, arc'hant oa bet gouestlet, Maodiern an Diabarzh avat a zarbennas goulenn MAUDUIT ha harzet e voe pep tra (sl. Yves TANNEAU, Le Pont de Port-Rhu à Douarnenez, Revue de la Société Archéologique du Finistère, Levrenn XXVI 1970).
- (22) Da heul enkemad LE BALL (1904) ez eo diaesoc'h dispoañ ar sardin spagnat pe portugalat, - eleze o degas dre voestadoù bras hag o gwerzhañ e boestoù binan evel sardin Breizh (sl. an

Notenn 14). Dre lezenn LE BALL (1906) ez eo berzet da vat. An nevelep dezv a laka endalc'h da verkañ war ar boestoù oberiet pe gwerzhet e Frañs ar riez orin hag an anvad azas. Oberierion Frañs enta n'int ket ken evit lakaat danzañ boestoù e Spagn pe e Portugal hag o gwerzhañ evel "sardin Breizh".

Ouzhpenn se, greantourion Breizh n'int ket ken unwerzhourion ar sardin-mir : da gevezañ o deus ouzh greantourion Spagn ha Portugal na reont nemet korvoñ an diaesadennoù ez int set d'ober er broioù-hont e grez an enkadenn gentañ (1881-1887).

Un trede abeg o deus da glask buan disentez : pell emañ o miradoù e derou an eil enkadenn a vezañ ken bras hag e derou an enkadenn gentañ.

Un ode a chom evelkent gant greantourion Breizh : mont da staliañ bouedvirerezhioù da Su Frañs war an aod atlantel pe da Euzkadi, evel ma ra CHANCERELLE ha BEZIERS da skouer.

- (23) Norge a gendalc'h da arbarañ sprat pe harinked e-barzh boestoù dindan an dikedenn "sardin". En U.S.A. ez eur endalc'hed adalek 1906 da verkañ war ar boestoù-mir anv an oberier ha lec'h an oberierezh. Evit an anvad "sardin" avat e vez toullerezh kefridiel : ar "Food and Drugs Act" eus an 30 maeheven 1906 a c'hourc'hemenn "doujañ" da anvadoù ar madoù, met an devez-arverañ o tont da heul a ro aotre da lakaat an anv "sardin" war an holl glupeged (*), en o zouez an harinked, ar sprat hag ar glizig (war-bouez an toun hag ar brizhili, kement peak a lakaer e boestoù-mir er mare-se a c'haller badezañ sardin er Stadoù-Unanet). Evit ar wech kentañ e-maez Frañs, e 1912, lezioù-barn Breizh-Veur a laka berz war ar "sardin norgeat". Pa grogas Spagn ha Portugal da glemm d'o zro e voe "douje" mui-oush-mui d'an anvad "sardin" er c'henverzh etrevroadel.

(*) Ar c'hlupeged (Gl. clupés), eus kerentiad ar c'hlupeid-eged (Gl. clupeidae), zo en o zouez :

- an harink (Gl. hareng), Clupea harengus - Linné;
- ar spratenn (Gl. sprat), Clupea sprattus - Linné;
- ar sardinenn (Gl. sardine), Clupanodon pilchardus - Walbaum;
- ar c'hiizigenn (Gl. anchois), Engraulis encrassicholus - Linné.

Ar skombreged (Gl. scombrés), zo en o zouez :

- ar brezhel (Gl. maquereau), Scomber scombrus - Linné;
- an toun, pe toun ruz, Thunnus (Geryonus) thynnus - Linné;
- ar jermou, pe toun gwenn, Thunnus (Germ) alalunga - Gmelin.

(Hervez Livra d'or de la conserve française, 1951, pennad gant M.E. LE DANCOIS).

- (24) Lezenn GUILLOTEAUX ne dalvez ket evit an eporzhadurioù o tont eus Spagn hag Aljeria; a-raok pell ivez e paeuz a dalvez-out evit ar c'henderc'hadou portugalat.
- (25) Ar bigi dre geflusker a ro tu da Spagnis da besketa gant rouedoù-tro rannet ('trains').
- (26) Sl. A.M.D'AVIGNEAU, id., p.256.
- (27) En eost 1904 e azas ar bodad ur c'houlennadeg a dizhas 5000

den hag e-doug ar bloavezh 1905 e tegemeras 300 respont. Ur veaj-studi a reas da Spagn e 1905.


- (28) Danevell FARRÉ-DOMERGUE a ginnig arnodif rouedoù nevez en ur lezel gant ar pesketaer pep gwarant da virout e labour ha da chom perc'henn d'e vag. Ampellet eo arverer ar bigl dre geflusker (arverer e Spagn ha Portugal) en arbenn eus ar c'hennoù a zegasfent er pesketaerezh, da skouer postadurioù bras-tre d'ober en ur mare ma n'eus ket kalz arc'hant gant ar besketaerion.
- (29) Ar soutadur gant an dorn zo an doare koshañ da glozañ ar boestoù-mir : lakaat a reer ar golo, ennañ un toullig, war c'horre ar voest leuniet gant pesked hag eoul, soutañ ar ribl ha stankañ an toull gant ur poent soutañ. An hentenn-se a c'houlenn nebeut a vinvioù met kalz labour. Hir eo ha bevennet eo ar c'hementad pesked lakaet e boestoù en un devezh. Ur souter a c'hell klozañ e-tro 60 boest en un eurvezh.
- Gant ar soutadur ardivinkel ez oberiataer e-tro 1000 boest en eurvezh. Ouzh ar golo e vez ur junt kendeuzad; er voest e lakaer ar pesked hepken ha ne vez leuniet gant eoul dre un toull er golo nemet goude soutañ hemañ.
- Diseñvel eo an erionadur. Ur junt gweñ (keilluz da skouer) zo ouzh ar golo; krafet e vez ribl ar golo ouzh genou ar voest ha pleget da stummañ un erion. Kaset e vez ar benveg-erionañ gant an dorn pe gant ur c'heflusker. Gant an erionerez-dorn e klozer e-tro 400 boest sardin an eur (boestoù kensturdaiek), ha 900 boest toun (boestoù kranennek).
- Priz-koust ar soutadur-dorn eo an uhelañ, peder gwech keroc'h eget ar soutadur ardivinkel, ha teir gwech keroc'h eget an erionadur (ardaladur an ardivinkoù lakaet e-barzh). Gant ar c'halvezderioù nevez-se e tigrsek eus 4 % priz-koust ar voestad sardin.
- (30) E 1896 endeo e voe ec'hwelioù souterion e Breizh, pa oa bet kroget da erionañ boestoù kranennek; ne veze scutet er mare-se nemet boestoù kensturdaiek koulz lavarout. E mae 1902, war c'houlenn souterion Naoned, e voe ec'hwel en oberierezh voestoù goull e Douarnenez. Englev e voe teir sizhun goude : ne vefe ket arveret ardivinkoù nevez e 1902-1903. E gouere 1902 pa zegouezh en ur vouedvirerezh eus Douarnenez an ardivink kentañ da glozañ ar boestoù ez eo distrujet gant ar souterion (14 gouere 1902).
- (31) E derou 1905, da geñver un ec'hwel all e Douarnenez (gant an holl vicherourion ha kenwerzhourion vihan, nemet ar besketaerion) e sav ar micherourezed o c'hweluniad hag es arc'hont bezañ gopret diouzh an eurvezh ha n'eo ket diouzh ar miliard sardin danzeet. Da geñver an ec'hwel-se e tibunont er straedoù a-dreñv ar banniel ruz.
- (32) "Ar gounid war ar priz-koust da heul an hentenoù nevez n'eo netra, eme LE BAIL, e-skoaz an diforc'h etre prizioù-koust Breizh ha prizioù-koust Spagn pe Portugal. Ent kelenvel ez eo an erionadur un doare fall, hervezañ, da glozañ ar boestoù"

Le Populaire, Naoned, mae 1909. N'eo nemet e 1910 e voe kaset arnodoù kefridiel. War o lerc'h, Maodiern ar Verdeadurezh a erbedas groñs an erionadur er c'hennadurioù graet gant e amezhioerezh. "Evit a sell ar varregezh o defe ar greantioù da zanzen muioc'h a besked, n'eo ket diouztu e vo gwelet pesketadennoù evel gwechall, eme LE BAIL" Le Populaire, id.


Abaoe dibenn an 19^t kantved e vez gant LE BAIL mouezhioù ar vicherourion hag ar besketaerion e Douarnenez. E 1906 ez eo dilennet aes-tre bennoz dezho (da geñver an dilennadeg-se e kane Douarneneziz er straedoù war don ar c'hantik : "Nous voulons Le Bail / C'est notre Père / Nous voulons Le Bail / C'est notre Roi"). Addilennet e voe e 1910, hag e 1914 daoust ma voe diaseoc'h dezhañ tremen ar wech-se. (Hervez A.M.D'AVIGNEAU, id., p.270).

- (33) D'an 11 gouere 1909, ar vicherourion a gas ganto ar besketaerion, ar re-mañ drouklouen gant prizioù ar pesked en deizioù a-raok, hag ar micherourezed. E c'hwec'h labouradeg e vez distrujet ardivinkoù. Al lu zo e Konk-Kerne en deiz goude. Ar greantioù all a gendalc'h da labourat. Tamm-ha-tamm es a skuish ar besketaerion ha diflach e chom souterion ar porshioù all; micherourion Konk-Kerne a ya neuze da glask emglev gant ar c'hreantourion.
- (34) En ur c'hengor e vodañ pesketaerion, greantourion ha leuridi eus ar Verdeadurezh n'eus nemet ar c'hreantourion a c'houlenn ma ve lezet frank pesketaerezh ar brihili, tud ar Verdeadurezh o toujañ ha ve diwerzh.
- (35) Pemp gwech ec'honoc'h eo an dundi eget ar chaloupenn; teir gwech keroc'h e koust e 1850 (Hervez A.M.D'AVIGNEAU, p.192). E-tro ugent vloaz e padont hag e derou ar c'hantved e vezont ardalet dindan seizh vloaz (Hervez A.M.D'AVIGNEAU, pp.278-279).
- (36) Etre 1896 ha 1906 e veze pesketaet e-tro 30-40 t grillad-mor bep bloaz. Adalek 1912 e vez pesketaet ouzhpenn 100 t bep bloaz, 172 t da skouer e 1914. (St. J.P. DUBOIS, Douarnenez, évolution et perspectives de développement économique, tezenn moulet e Kemper, 1964).


I. Emdroadur poblañs Douarnenez etre 1800 ha 1950.
II & III. Emdroadur ar feurioù-gwel ha -mervel e Douarnenez, Frañs, Breizh-Veur etre 1800 ha 1935.
IV. Niver ar bouedvirerezhioù e Douarnenez etre 1850 ha 1914. Kartenna Douarnenez en 19^t kantved.




TAOLENN I. - Endroadur poblañs Douarnenez etre 1800 ha 1950.




TAOLENN II. - Endroadur ar feuriou-genel e Douarnenez, Frañs, Breizh-Veur etre 1800 ha 1935.



TAOLENN III. - Endroadur ar feuriou-mervel e Douarnenez, Frañs, Breizh-Veur etre 1800 ha 1935.



TACLENN IV. - Niver ar bouedvirezhioù e Douarnenez (+ Treboul) etre 1850 ha 1914.



AN EMSAV HAG AR VRO (46)

LIZHEROU

"E G hon eus studiet ar pennad Keñverioù Breizh hag ar bed [Emsav 56/311-319 1971], hag un evezhiadenn a'm eus graet en abeg da frazennoù a zo un tuginadur, peogwir e vank episadurioù.

"Setu ar frazennoù :

"Hogen, en eneb d'ar Chouaned, ar strivoù graet gant an emsaverion gentañ evit azasaat ar gevredigezh henvoazel ouzh an amveziadoù nevez, a daolas frouezh puñh evit adsav pobl Vreizh".

"Ha goude :

"Ar gweladur o doa tud an Emsav kentañ eus ar bed a extacle o son da welout diskar ar gevredigezh henvoazel () ha, dre se, mirout Breizh bev o terc'hel Breizhis en henvoazelezh".

"Da'm meno e oa ret displegañ peseurt strivoù o doa graet evit azasaat ar gevredigezh henvoazel ouzh an amveziadoù nevez, rak :

" - "azasaat ar gevredigezh ouzh an amveziadoù nevez" a emleg disteurel eus ar bed henvoazel, ha

" - "o terc'hel Breizhis en henvoazelezh" a emleg argas an amveziadoù nevez." (16 01 72)

EMVR-301

Respont da EMVR-301 :

"Tud an Emsav kentañ ne gomsent ket eus ar gevredigezh henvoazel. Meizad an henvoazelezh a oa estren dezho. Se to aes da gompren: bevañ a raent er gevredigezh henvoazel ha n'o doa ket anavezet an treuzfurmadoù a zo c'hoarvezet abaoe er gevredigezh e Breizh. Evito enta, ar gevredigezh vrezhon zo ar gevredigezh henvoazel (gant ar framm parrezel, h.a.). Gwelout a raent evelkent un nebañ toulloù er vag : dre an toull-mañ en em eile ar galleg, dre an toull all ez ae da get an obererezhioù armerzhel henvoazel, h.a.. Ar gudenn evito oa peñselañ ar vag kozh (ha n'eo ket sevel unan nevez). Gant ar brezhoneg unvan e vo stourmet ouzh ar galleg, gant ar rannvroelouriezh e vo gwarezet Breizh diouzh reuzioù ar bed diavaek.

"Un dislav ar a oa evelkent etre ar pezh a rae tud an Emsav kentañ hag ar pezh a vennent ober. Div skouer a roin :

a) E-keñver yezh e felle da F.VALLEE ober eus ar brezhoneg ar yezh unvan barrek da gevesañ ouzh ar galleg (amveziad nevez). Hogen brezhoneg unvan F.VALLEE ne oa ket azasaetoc'h ouzh ar bed henvoazel eget an teodyezhoù henvoazel ouzh ar bed arnevez. Ar yezh nevez krouet gant VALLEE ne o'halle talvezout nemet en er gevredigezh nevez ha n'eo ket er gevredigezh henvoazel (n'o oa bastus-kenan an teodyezhoù henvoazel). Seurt dislav ar avat zo chomet estren da veizerezh tud an Emsav kentañ (ha da gant tud an eil Emsav ha hiziv c'hoazh d'un niver mat a "stourmerion a'r brezhoneg") : a-walc'h eo gwelout gant peseurt pennegesh ez eo bet kaset

EMVR-302

an arc'hadurioù evit ma ve lakaet ar brezhoneg e skolioù ar Stad c'hall (hag e re an Iliz). E grez an Emsav kentañ end-eeun ez eo bet kroget seurt arc'hadurioù.

b) An Emsav kentañ pa c'houlenne ar rannvroeladur a venne mirout Breizh er-maez eus ar froudoù a eilpenne ar bed. Hogen ar bruderezh rannvroelour kaset a denne da erlec'hiañ un emekiant vrezhon (rannvroel a lavar bremañ tud 'zo) ouzh an emekiant parrezel henvoazel. Ne vele ket an dislavar a oa etre ar pezh a venne ober hag ar pezh a oa emleget gant e obererezh.

"An dislavar a verkez e'z lizher zo enta dislavar-diazez an Emsav kentañ." (04 02 72) EMVR-302

"E-barzh DEAD-1, Emsav 61/7 +10, e lenner : "un elfenn en istor ne c'hell ket mont e daelerezh gant un elfenn en istor". An elfenn istorek-se o vezañ ar Stad c'hall, n'eus nemet an Emsav a c'hell mont e daelerezh ganti evel elfenn istorek vrezhon. Perak n'en meneger ket d'an ampoent-se, da nebeutañ evel Emsav istorek peogwir ne ve ket ar c'hendivizer brogarour kizidik ouzh an Emsav devoudel ? Dre aon na gomprenfe ket an diforc'h a zo etre an daou ? An tav-se war an Emsav a'm diaesa un tammig. Pe neuze e soñjer ez eo gwelloc'h lezel ar c'hendivizer d'en em c'houlenn e-unan petra eo an elfenn istorek vrezhon da lakaat e daelerezh gant an elfenn istorek gall (mar bez gantañ ur spered daelerezhnek), ha da zeuxren drezañ e-unan (mar bez gantañ un tamm posli) ar respont : an Emsav ?" (31 01 72) EMVR-303

Respont da EMVR-303 :

"A-nivout an daelerezh etre elfennoù en istor hag elfennoù en anistor, e verkez aze dres un toull a zo bet graet en ur maladur kentañ eus ar pennad ma lakaed an Emsav e kont. Lamet eo bet an arroud evit seunaat ar skrid, gant ar mennoz da adkemer ar c'hraf diwezhatoc'h. Setu an tamm lamet :

"Ken diaes all eo lakaat en heveleg frazenn-daelerezh ar reizhiad c'hall, elfenn istorek, hag an Emsav, elfenn ledistorek. Hogen, ma n'eus daelerezh saviadel ebet evit c'hoazh etre Emsav ha galloud gall, ez eus endeo un daelerezh kemplezh o vont en-dro : un daelerezh diabarzh emsavel, o luskat en-dro dezhañ un daelerezh diabarzh e pobl Vreizh (o loc'hañ diwar ziaz an Emsav n'eo ket gwengelek komz eus pobl Vreizh : an daelerezh diabarzh daluskat gant an Emsav end-eeun er boblañs a ro dezhi derou un dalc'h istorek-ledistorek keit ma ne zic'hliann ket e stumm daelerezhioù diavaek). Ret eo markañ devoudoù pouezus : daelerezh an Emsav zo saviadel-kealiadel; an delusk avat embreget gantañ er boblañs o tevoudañ un daelerezh diabarzh (saviadel-kealiadel ivez) zo kealiadel hepken. E lec'h all ez eus bet lavaret e oa an Emsav ur c'henderc'her arbennik pe genderc'he ur bobl (pa oa anezhañ ur c'henderc'her kevredigezh); aze emañ argerzh ar c'henderc'hañ-se : an daelerezh diabarzh deluskat gant an Emsav er boblañs, ouzh he degas da gemer dalc'h istorek. Dre an argerzh arbennik d'an emsavelioù diavaek, an hollstaad, en deus kealiad an Emsav ur gwerc'h-deluskat : un daelerezh diabarzh a sivan en-dro dezhañ er vro. Al ledemsavelioù, a-benn

EMVR-304

ar fin, n'int nemet un arvez, ha marteze n'eo ket an hini pouezusañ eus ar gwerc'h-deluskat-se, eus ar gwerc'h-geneal-daelerezh-diabarzh-se."

"Lamet eo bet an tamm-se, rak ne zle ket DEAD bezañ re zankanek, na re ziaes. A-du-rall, mui-ouzh-mui e soñjan e rankomp diakouez hepken an elfennoù kreñv eus an Emsav, elze ar bonnoù peuriator-ekast eus ar c'healiad (displegadur ar gallekaat evel lankad eus an daelerezh o tisoc'hañ gant amparadur ur vro arnevez, riek ha brezhonekaat, da skouer), hag ez eo gwelloc'h an arvezioù ledistorek eus an Emsav evit tud o deus meiset pennaenn istoregezh an Emsav." (02 02 72) EMVR-304

"Setu, da'm menc, an daou zoare da ginnig istor Breizh :

- an doare hon eus arveret betek bremañ : hanez pobl Vreizh (tamm-ha-tamm kempennet gant ar sklerijenn a daol warni an ergor-eiezh emsavel) + hanez an Emsav (mui-pe-vui kinniget ivez an ergorelezh an Emsav). N'omp ket deuet a-benn avat a) na da ziverkañ an torr etre hanez pobl Vreizh ha hanez an Emsav (anistor an eil, ledistor egile ne unanint nemet e stumm an istor a vo istor evit an eil hag egile) b) na da lamet an torroù hon eus degaset en hanez pobl Vreizh; an torroù-se zo etre an darvoudoù a roomp dezho ur ster istorek en ergorelezh an Emsav (ur gallekadur da skouer) hag ar re n'hon eus ket c'hoazh roet ur ster istorek dezho; an heveleg torroù zo bet ivez en hanez an Emsav - aze avat ez eo degouezhet pelloc'h argerzh an istorkadur;

- e-lec'h loc'hañ diwar an hanez hag istorekaat, e ve tu da loc'hañ diwar an istor ha klokaat, elze da zere'heil kont hepken eus an darvoudoù hon eus roet o ster istorek dezho ha degas tamm-ha-tamm re all. N'ouzon ket avat ha tu ez eus da gregiñ gant frouezh en doare-se. Re abred e ve ? Ne ve ket a-walc'h a zary-oudoù istorekaat c'hoazh ?

"Forzh penaos, un dra zo da verkañ : darvoudoù an anistor a c'hell bezañ istorekaat a-c'houde-taol. An istorkadur-se a empleg evel just un embregerezh-distreiñ d'an istor; pouezus eo markañ a) e c'hell an embregerezh-se istorekaat darvoudoù tremenet b) an argerzh istorekaat an tremenet (hag ar bremañ) a c'hellomp embreger o vezañ c'hoazh el ledistor, da lavaret eo hep bezañ krouet c'hoazh darvoudoù e par ar gevredigezh vloc'hañ hag hollvedel. Evel just, hep an daou c'halloud-se ne vije ket a emsavelioù-diabarzh, - mat eo evelkent o sklaeriañ.

"D'an emsavelion pe an danvez emsavelion o deus meiset petra eo embregerezh-istorekaat an Emsav ez eo ret kinnig an istor evel n'hon eus e skrivet betek bremañ, elze anistor pobl Vreizh e ledistor an Emsav gant takadoù istorekaat ha takadoù hep ster istorek. War un dro avat e rankomp kinnig an embregerezh-istorekaat hag evel-se emañ ar pare e-kichen an droug e stumm ur gouvidenn da gas pelloc'h an erv.

"Evit an dud avat ha ouzont tra eus embregerezh-istorekaat an Emsav, petra reiñ ? Tisek e vo dezho bezañ ur "istor eus an Emsav" c'hwezhet ha pouezusañ, pegel ouzh ardoez "istor Breizh". An "istor Breizh" a ginnigomp ouzhpenn se a habvalc dezho bezañ ur furn warist, "tendancieuz" eus an "istor ergorek" a anavezont.

Tamallet e vo dimp kinnig da ergorel an devoudoù a welomp a-dreuz d'hon c'hoant; ergorelezh an Emsav n'en deus fetisadur ebet c'hoazh er bed ma vev an dud-se, hag evito ez eo ergorel ar pezh a glot gant ergorelezh ar bed ma vevont. Petra kinnig dezho neuze ? Da'm menno ez eo diaes kinnig estreget an darvoudoù en deus an Emsav roet o ster istorek dezho. Hag a-walc'h ez eus anezho evit ma c'hallfemp lakaat ar skritell "istor Breizh" war an teskad a reont ? a-benn ar fin n'eus aze nemet ur gudeenn furlmel eilrenk. An darvoudoù-se eo a ra an istoregezh vrezhon, pe c'hoazh an Emsav istorek, pe c'hoazh keleennadurezh an Emsav.

"Evel just, mankout a ra dimp dankanvezh an diempradur. Gant an diempradur ez eo c'hoarvezet pezh a zo c'hoarvezet gant ar vroadelezh : bevveg eo bet da gemet a dreusfurmadiou en hon c'healladurezh ma rank mont da heul ha bezañ treusfurm d'e dro. Anzav a ran ez eo laterek va sell war an tu-se. Evel a lavaremp n'eus ket pell : evit gouzout pelec'h e krog an diempradur en ur gevredigezh e ranker gouzout petra eo ur gevredigezh kenempret. An doare n'hor boa gwechall da intent ar c'henempradur oa e gwirionez ijinnet evel kontrol da ziempradur kevredigezh Breizh etre he renkad, pezh a oa kemer an disoc'h evit an arbenn. Azonou all zo bet kavet abaoe, unan eus ar re zeurusañ eo an hini a zeskriev H. bremañ : an darempredoù etre parzhioù ar gevredigezh (renkadoù, gennadoù armerzhel, h.a., emanaoudegezh istorel ha kevredadel) o vezañ e dalc'h an diavaez. Pezh a vank c'hoazh eo an dankanvezh a savelo an diempradur a) e-keñver ar c'henderc'hañ istor b) evel kevanek ouzh daelerezh diabarzh an distro d'an istor. (Kement-se ne lam ket o zalvoudgezh digant an imbours'hiou hanezour ha kevredadour war an devoudoù a-welomp-ni e goulou ergorelezh an Emsav evel azonou a ziempradur; diziouserus eo an imbours'hiou-se, hogen frouezhiou ameeun hepken a zeu diwarno : an devoudoù a lakaont a-wel zo danvez mut e-keñver Emsav; an emsaver oc'h en em frotañ outo a daol goulou warno ha pelloc'h egeto). Dav e vo frotañ mat hon ibilou-tenn-tan c'hoazh..."

(01 02 72)

EMVR-305

"J en deus komzet din eus pennad DE BERNIS war an isdioreadur [J. DESSAU et G. DESTANNE DE BERNIS, Le sous-développement est aujourd'hui considéré comme le produit du système mondial capitaliste, Le Monde Diplomatique, Kerzu 1971, p. 13]. Da'm menno, da heul keñverioù Breizh hag ar bed [Emsav 58/311-319 1971] hag eus an holllelaat vroadel d'an holllelaat bedel [Emsav 60/375-388 1971] n'eus ket tu da genderc'hañ gant an termenadur a zo bet roet betek-henn d'an isdioreadur; ha marteze ez eo distremenet da vat ar reizh. Gwelout a ran en isdioreadur evel ma's eo deskrivet gant P. PENNEK [Isdioreadur hag armerzh, Preder 84-85/3-23 1966] ar pleg da glask en diavaez arbennoù ar pezh a c'hoarvez er vro ha rakskeudenn ar pezh a c'hoarvezo anni. Se zo ober eus ar broioù sujet elfennoù gouzañvat eus ar sujidigezh ha dianaut ar stourmoù taer a zo bet bepred da vare pep sujidigezh. Betek-henn omp bet techet betek re da gemer da skouer ar pezh a oa "reizh" e kevredigezhioù a oa "deuet a-benn". Lakaat a ramp goulennoù evel : "perak n'eo ket deuet Breizhiz a-benn da sevel ur Stad evel ar Saozon pe

ar C'hallaoued ?" Ar skouer eus ar pezh o dije dleet ober Breizhiz o vezañ pezh a ras d'an ampoent Saozon pe Gallaoued. Seurt gweladur a glot gant ur vro klozet warni hec'h-unan pe un Emsav klozet warnañ e-unan. Divastus eo peogwir e tianves an ereoù a zo etre sujed ha sujer; peogwir ez eo ur gweladur lec'hel, darnel ha strizh. He gav din emsaver o tistremen seurt doare gwelout (hag an distremenadur-se zo un azon a estroadur)." (21 02 72) EMVR-306

DANEVELLOU GBEREREZHSkourr an Deskadurezh Vroadel

Emvod hollek Skourr an Deskadurezh Vroadel e Roazhon d'ar 6 C'hwevrer 1972.

S.A.D.E.D.

Gwazva ar C'helenn. Kinniget ez eus envel ur C'helenn war ar Vevoñezh da amsaveñ Arzel EVEN, hag ur C'helenn nevez war ar Yezhadur.

Ar C'helenn Lennegezh a laka ar goulen : petore lec'h o deus ar c'hentelioù Lennegezh e stummadur an dud. Diziouserus eo anaut lennegezh an Emsav. N'eo ket lavarout ez eo diziouserus studiañ kentelioù Lennegezh S.A.D.E.D.. Ezhomm zo da adober un darn vat eus ar c'hentelioù.

Ar C'helenn Istor a ziskouez boz gant e skolidi. Desket o deus penaos kaout krap war ar pezh a zo da zezrannañ. Goulenn a ra ma ve liammet strishoc'h ar rumadoù disheñvel. Istor, Douaroniezh, Lennegezh, da skouer ma c'hallfe ar skolidi studiañ Douaroniezh Vreizh war un dro gant Istor Breizh en 20th kantved, studiañ Lennegezh hag Istor an eil Emsav war un dro.

Ar C'helenn Politikouriezh a verk ez eus ur bern traoù dispreedet er rumad kentelioù kentañ. Ur spleet zo eus, pa rank ar skolidi, ouzhpenn studiañ ar gentel, he dezvazn ha mont pelloc'h. Ar patromoù poelladennoù embannet heveles a dalvezo da zavez studi evit skolidi ar bloaz a zeu. Skolidi 'zo a gav ez eus choukadur etre testennoù ar poelladennoù, meur a c'houlenn o tennañ d'an hevelep danvez; an holl boelladennoù, emezo, ne roent ket tu da gemer keñverioù ouzh an Emsav. Goulenn a reont ma ve ad'hrast testennoù poelladennoù 'zo.

Ar C'helenn Douaroniezh a denn an svesh war live ar yezh gant daou eus e skolidi : un amkan d'ar c'hentelioù eo barrekaat an dud war ar yezh. A-hend-all e kav ez eo digempoust an danvezioù a ya d'ober an daou rumad Douaroniezh; kinnig a ra ma ve degaset ar gentel war Vreizh er rumad kentañ. Ar skolidi a c'houlenn ma ve caskennet furm ar poelladennoù : kala re a bleustradennoù o deus d'ober war ar glenn, re a gartennoù etre traoù all.

Penn an Darempredoù a negas e glenn adarre war an dale a zo gant reizherion 'zo o taskorif ar poelladennoù.

Gwazva ar C'hengoun a studi ur c'hinnig prenañ ijinenoù nevez evit an Embann, hag a sivil-daveñ ur goulen prenañ da vras ar Marezeg.

EMVR-307

Gwazva ar Mererezh a embann kontoù ar bloavezh 1971. Prientet e vo steuñv 1972 a-benn ar Breudoù.

Kelc'h Debauvais

Gwazva ar C'helenn a ro keloù eus al labour war Beb (kentelioù Brezhoneg eil bloavezh). Hogos prest eo an dek kentel kentañ da vezañ kaset d'an embanner.

Goulenn a reer ha reizh eo diskleriañ anvioù ar skolidi en aozadurioù-kreiz. Aesoc'h eo evit gwiriañ kerzh hollek ar c'henteliezh hag ivez taladur ar gwirioù-enrollañ. Izili 'zo a wel aze ar arvar diouzh un tu evit emrended ar c'helligoù, diouzh an tu all evit an diogelroez.

Degas a reer c'hoazh kudenn al levrioù prenet gant K.D. da adwerzhañ d'an izili ha d'an danvez izili er c'helligoù. Arc'hant sonnet zo en aozadur-kreiz en arbenn eus ur staliad levrioù n'eus ket goulenn warno. K.D. a ginnig fiziout hiviziken kenwerzh al levrioù er c'helligoù o-unan. Pedit a ra ar c'helligoù da zasp-arzhañ etrezo ar staliad levrioù chomet en aozadur-kreiz.

Evit eeunaat a-hend-all an darempredoù gant ar c'helligoù, e kinnig K.D. ma ve freuzet reizhiad ar gwirioù-enrollañ evit ar skolidi ha grataet dezhañ da gempouezadur ur skoaziadenn vloaziek gant ar c'hef-kreiz.

EMVR-307

